

1934

Sant Erwan Heloury

Patron an Avokadet

*Advocatuz set nun latro
Iles miranda populo*

An avokad laer ked a vo
Karet a meulet en pep bro

(Moulet gant madelez Erwan S
euz Kergavarek, Sant-M
Montroulez: Trugare mad

Piou neuz ked klevet an doare
Deuz sant Erwan ar wirione ?
Muioc'h brudet wit sant Herve,
Pignet war lein Mene Bre :

Sant Erwan eo tad al lealdet
Gwir benn-skwer an avokadet,
Difennour ar beoyen glac'haret,
Ha gant pep breizad eo karet

Leun a furnez, 'vel eur gwir dad,
D'an holl e r e kuzul-vad,
Jikour pep den ervez he stad :
Da viken dezan hor mennad !

N e ked evit aour n'hag arc'hant
E laboure gwechall ar Zant ;
Wit mann e tenne brao ha koant
Ar paour kaez den a nec'hamant ;

Goude rei kelen wit netra
Teue en pep lec'h de c'harpa ;
Ha gant ar wirione sklaera
E tisplege dezan pep tra.

Dindan eun derven a leraer,
A drem-dost da gear Landreger,
Eo e prezege gant eonder ;
Vel difennour ha vel barner :

An holl 'zirede di gant mall
Evit dizvarn pep pleg tenval,
Hanaout ar mad demeuz ar fall,
Evel da gaout Sant Loeiz gwechal.

Holl avokadet ar c'hearjou
Renkaez dilezel ho c'hargou,
Sklapout ar zae 'toez ar pillou ?
Den n'ae da jilaou ho c'hojou.

Ar brud outan c'haez pell iskiz ;
Dre holl c'houlenner he ziviz ;
Velkent eun dro c'haez da Bariz
E renkaez distrei war he giz :

Holl avokadet ar gear-benn
Yeaz d'ezan beteg ar p l krenn,
O tond a vern dindan he wenn
D'er pedi n'han-Doue de n'em den ;

Dezan 'larchont, 'vel pennou foll :
« Gelennid ket wit mann an holl
Pe 'man hom stal o font da goll,
Ha nin 'vemp ken laeron dirol ? »

Renket 'deo touet da Erwan
Ober reizter da bep unan
Hep laerez nikun, dindan boan
Da goll ar garg prim ha buhan.

Pell goude eur seurt kevridi
Na vije gret ken a druchuri ;
Met n'hag a bed pez troatad fri !
Deuz bed a boe meur a hini

An dud a lezen a viskoaz
So bed hag a vo laeron braz ;
Na glaskont gant paper glaz
Met laket ar paour kaez en noaz !

Dalc'hmad ho dent vo lemm hag hir,
Hag en ho c'hreiz eur galon dir
A glasko bep taol gant pep gir
Laket ar gaou da veza gwir.

O Doue ! na pebeuz dizam,
Deuz p otred an holl droiou kamm,
A rafe 'r zant a neve flam
O tond deuz an Env en eul lamm ?

Nag a bed avokad trei tour,
Gant aon da lonka re a zour (!)
A rafe c'hoaz ho faotret flour
Da Zant Erwan ho milizour :

Diredek 'raefent primm a bell
Da gaout ar zant da Vreiz-Izel,
Da laret ober gwelloc'h-well
Gwir lealdet beteg merwvel !

Da douet holl en eul lavar,
Helfe distrei d'an Env hep mar ;
N'o mui a boan n'hag a c'hlac'har
Demeuz o feurz war an douar ?

Hag ar zant mad 'larfe d'he dud,
(En eur vont kwit dre eur burzud,)
« Ma vezit c'hoaz ker laer ha ker yud
Benn kenta tro m'o kraio mud ! »

Ha filloret ar zant gwirion,
Didrue deuz paour ha mignon,
Ankouefe gourdrour ho faeron,
Hag a chomo bepred laeron !

Biken hini 'gerzo ben reiz
War an hent mad 'vel Erwan I
Ledan ho manch ha frank ho c
Na glesfont met madou a leiz !

An n'heb en heuilfe-koulskoude
A vefe zavet pell goude
Kalz huelloc'h wit eur roue,
Hag azeulet 'vel eun Doue !

Petra d l demp kaout madou s
Pa vez awalc'h wit dont ha mo
Heller bale 'veltan, dispont,
Ha divlam war hon zam boul r

Pa gemerfomp ar zant da stur,
O c'heuil ali vad ar re fur,
Hag o trei kein d'al lern udur,
Ni m'omp hor gwal'h a blijadu

Er stum-ze 'vad, kenvroiz kaez
An druchuri 'y l prest er maez
Hag e vo peoc'h ha levenez
Ganemp en kear 'vel war ar m

Diwar hom c'houst ar baotred
A renko hehan da c'hoarzin (!)
Ha lakat dour barz en ho gwin
Pe distrei krenn war an t -gin

Na n'helfont ken chom en tre
Beza la al pe mont d'an ttraou
Rag biken, na y l mat an trao
Ken a vo trec'h ar gwir d'ar g

Ya ! 'benn ma kezo plom ar be
D'an avokaded a vo red
C'heuil hent ar furnez c'bed-da
Evel Sant Erwan, reiz bepred

D'an n'heb er graio mil benno
Bue gaer hag hir, da c'hortoz
Mont gantan war eon d'ar bar
L c'h 'vaer evuruz deiz ha noz
Ha l c'h neuz ken na trouz na

Ch. RC

Feloury

208

(Moulet gant madelez Erwan SABIQU
euz Kergavarek, Sant - Martin -
Monfroulez : Trugare mad dezan)

Ha filloret ar zant gwirion,
Didrue deuz paour ha mignon,
Ankouefe gourdrourz ho faeron,
Hag a chomo bepred laeron !

Biken hini 'gerzo ben reiz
War an hent mad 'vel Erwan Breiz
Ledan ho manch ha frank ho c'hreiz
Na glesfont met madou a leiz !

An n'heb en heuilfe koulskoude
A vefe zavet pell goude
Kalz huelloc'h wit eur roue,
Hag azeulet 'vel eun Doue !

Petra dâl demp kaout madou spont ?
Pa vez awalc'h wit dont ha mont,
Heller baie 'velian, dispont,
Ha divlam war hon zam boul rond ;

Pa gemerfomp ar zant da stur,
O c'heuil ali vad ar re fur,
Hag o trei kein d'al lern udur,
Ni m'omp hor gwal'h a blijadur.

Er stum-ze 'vad, kenvroiz kaez,
An druchuri 'vel prest er maez
Hag e vo peoc'h ha levez
Ganemp en kear 'vel war ar meaz :

Diwar hom c'houst ar baotred fin
A renko heban da c'hoarzin (!)
Ha lakat dour barz en ho gwin,
Pe distrei krenn war an tû-gin ?

Na n'helfont ken chom en tre daou :
Beza laçal pe mont d'an ttraou ;
Rag biken, na yel mat an traou
Ken a vo trec'h ar gwir d'ar gaou.

Ya ! 'benn ma kezo plom ar bed,
D'an avokaded a vo red
C'heuil hent ar furnez c'hed-da hed
Evel Sant Erwan, reiz bepred !

D'an n'heb er graio mil bennoz !
Bue gaer hag hir, da c'hortoz
Mont gantan war eon d'ar baradoz,
Lêc'h 'vaer évuruz deiz ha noz,
Ha lêc'h neuz ken na trouz na kroez.

Ch. ROLLAND.

Kan Gwenn-Dud Breiz

(Chant National Breton)

209

v. Annalen de Bretagne

Ton : Kymraek

t XLVI n°. 1 et 2 . 1939

723 B et 806 B

Signale par U. d'Arvor n°. 1

Kanomp gloar da Vreiziz. eur wen-dud dispar !
Kaera tud kalonek daol troad d'an douar ;
Deuz stourmet a viskoaz en daou dû d'ar mor,
En Breiz-Meur vel en Breiz-Arvor :

Diskan :

Breiziz a beb Bro ?
Eun deiz c'hoaz ni n'em juntro ;
Hag en deiz-se, breudeur, pa vo deut hom zro
Ar Bed ganemp a dregerno !

2

Rannet gant ar mor braz, war den ped kant vloa ?
Diou vro Breiz 'zo chomet henvel en pep tra :
Memeuz yez, memeuz stum a memeuz gijou,
Pebeuz skwer beo 'loez ar Boblou !

Diskan :

Er bed holl tro-zro
Pep rum-dud a gar he Vro ;
Met neuz ked eveltomp da zerc'hel ato
Faeal d'hom gwir, d'hom frankizo !

3

Ni Breiziz an Arvor krenv 'vel an dero !
Kalet vel hom reyer, a gar stard hon Bro ;
Deuz ar mor d'ar menez, lêc'h hom diwanet,
A lêc'h 'man hon zud koz kousket :

Diskan :

Breiz-Izel hor Bro !
Brava taol-douar a zo ;
Tre vo klêvet ar mor o kroal tro-zro,
A rum da rum ni da garo !

4

Ni zo eur bobl gwirion, birvidik atao !
A m'eum eur yez sklintin, gwiskamanchou brao,
Gijou leun a gaerder, tentussa doare,
A ro dalc'hmad nerz d'ar vüe !

Diskan :

Breiz-Izel, hor Bro !
Ni da gar ha da garo
Tre ma vo goueliou kaer, pardonioù tro-zro
Merc'hed koant ha bleun er parko !

5

Beteg el labourioù ni ve bepred yê !
Lazou braz, nozvechou, kaniri bemde ;
Ma vemp holl, pad ar bloaz, évruz deiz ha noz,
Gant hom yez hag hom gijou koz !

Diskan :

Breiz-Izel, hor Bro !
Lêc'h 've plijadur bep tro :
Gant lore h a greiz kalon ! bepred ni gano
Enor da Vreiz er Bed tro-zro !

Ch. RO

Gwerz Skeuden-Zen ar re varo, koeet o tife

(Laret en enor da re Werliskin, deiz Gouel ar Men, d'an

193
Mignonet,

Evel eun tarch kurun, pa strakaez ar brezel
E oam holl glac'haret war douar Breiz-Izel !
Ha kement pobl gwirion ganemp dre ar Bed-Holl
A grenaz gant ar spont ! dirak ar stad diroll ;

Rag biskoaz c'hoaz, tud kaez, n'heblec'h war an douar
Oe gwelet ker goaz reuz, stignet gant tud digar !
Brezel kriz ha treitour, prientet mad en kuz,
Eneb ar Franz dreist-holl, gant Pennou Pruss lorc'huz :

Gwillou daou hag he vab o d'oe laket 'n'ho fenn
Gouarn ar Bed paour-man dreist chouk ar Fransijen,
Kement digare fall wit erhout 'oa mad (?)
Ha kerkent an Urop 'oa en tan hag en goad !

Allaz ! kenvroiz ker, red a oa n'em difen,
Pe bez dindanne vel gwir esklavourien ;
Rag ma nije trec'het er wech-man tud Gwillou
'Oa gret deuz hor frankiz ha deuz hon holl gwiriou ;

Poblou ar bed a bez a vije bed gante
Evel a oam gwechall tre dindan *Gozel-yé* ;
Met Bro-Zaoz er gwelaz 'dalek an heur kenta,
Hag a deu prim d'hom c'heul evit c'harz kement-ma.

O na pebeuz anken en kalonou an holl !
Pa oam er c'hrog kenta bed war ar poent da goll ;
Pa deuchont gant Von Kluk ker tost all da Bariz ;
Med pebeuz stad ! pa m'oam gret d'è mont war ho c'hiz.

Raez pevar bloaz anter eo bed padet ar bec'h,
Dre holl garm ha kanvou, dienez, kroz ha nec'h !
Bete ma teu n'hon toez an Amerikanet,
Da rei nerz ha skoazel d'ar Gwir, d'al Lealdet !

En tro pad ar c'heit-se, ar Vretoned dalc'h-mad
A deuz gret ho dever en kreiz tan an argad ;
Ha daoust ma koeë stank hom zud war an dachen
O deuz dalc'hed da stourm, kalonek penn-da-benn ;

Tud doujet ha dispont ! en emgannou goassa
Paotred Breiz a vije renket er penn kenta ;
Hag en kement taol-krog 'deuz bed roet ar lanz,
War vòr ha war zouar da armeou Bro-Franz :

En Dixmut, koulz laret, ne oa met Brètonet
O tere'hel da rei penn d'eur bern Prussianet ;
Er Champagn. vel er Somm, hag en Verdun dreist holl,
Deuz roët ho bûe 'vit harz ar Franz da goll.

Echu d'ar gann euzuz, n'hak a bed a lare
E z'oa grass d'hor mibien m'ar m'oamp bed al lore !
Penaoz ankouez neuze ar re 'skwillaez ho goad,
Gourzetet pell ouzimp, evit hor zavêtad :

Eur seurt ankouez n'hell ren en kalon tud vad Breiz,
Ha savet zo deze Skeudennou-kaer a leiz !
Da verka en pep lec'h ar gwir anaoudêgez,
A zougomp holl gant lorc'h 'vit hon zoudardet kaez !

II

Setu ni dastumet en Guerlisquin hirie,
Dirak ar Men kaer-man gant kalz a garante,
War b'hini e lugern hanaou ar baotred vad !
Da envor zagr pere ni gass hor gwir mennad.

Hor goad deuz ar men-man a domo muioc'h-mui
Dre m'eo gret gant unan deuz hom re, Loeiz Tilly ;
Ar zijen kizellet gant paotred ar gear-man ;
Skeuden ar gwir *Poalu* a zao distak war-n-han ;

Obujou chadennet a ra deuz traon he stern ;
Bleuniou a bep sort liou, kurunennou a vern
A ra dezan an dro ; pep hini n'he gever,
En hom zamik paroz, a neuz gret he zever ;

Gwelet a ran 'veltoe'h, al Loreen rôet
Gant « Paotred ar Boulou », 'so deuz ar Men staget ;
Dindanni kurunen kreñnardet vad ar skol
Testeni gloriuz ! a stok hor c'hreiz beb taol.

Met ar muia tener, dreist oll ! eo kurunen
Ar re zo bet glazet gante war an dachen ;
Kamaladet paroz, 'deuz gwelet ar maro
Ker tost all evelte, 'pad ar brezel garo !...

Grass d'eoc'h. ô merzerrien ! ni 'zalc'h d'hom gwir, d'hom stad,
Hag a glasko laket au traou dont war wellad ;
Pa-peud gret ho tever, ni raie hon hini
O c'harz diwar ho re gwalen ar reverzi.

Kanvou 'bed ken breman ? Sec'hit holl ho taol
Hom zud dre ar Men-man, gwelit n'heint ked maro ?
Pa domout kreiz an holl o rei nerz ha skoazel
D'ar re veo da gerzet trezek eur vùe well.

Ha c'hwi, kousket en peoc'h, bugale Bräiz-Arvor
Ma oac'h en poan 'witom, oc'h ganemp en enor !
Ho c'hanaou ker a vo savet hùel bepred,
Ganemp a rum da rum, beteg m'o fin d'ar Bed !

o tifen ho Bro (1914-18)

n, d'an 11 Even 1922

198

III

Duhont war an dachen, en toez ar re varo,
Ar Franz neuz dibabet eun haroz dishano,
'Zo douget gant doujanz, en kreiz lidou dispar !
En toez hom zud brudet, er Pantheon a c'hloar !

Skeudenni 'ra eno, mignonet, en hano
Kement soudard kouet o tifen d'emp hor Bro :
Piou e zê ? den n'er goa ? eur Brêton martreze ;
Neuz forz piou ? Poalu Franz ! vo d'an holl, bep mare.

Trist eo mervel yaouank, an holl er goar, siwaz !
Met na neuz ket kaeroc'h : p'er graer divlam, dinoaz ;
Setu perag Poalu, dre holl war an douar
Eo brudet ha meulet da vertuziou dispar !

Gret a peuz ar walheur 'vel ar C'brist biniget
O rei da vûe glan da zavelâd ar Bed ;
Ha dre da wir gundu, o tiskwel sklaer d'an holl
Penaoz eur bobl reizet n'hel kamet mont da goll.

Ar Franz a bez hirie a skwuil warnout bennoz !
Dre skeudeunou mein kaer savet en pep paroz,
A vezo da viken eur merk a drugare
Hag eur skwer diwarvel evit hor bugale

Envel beo, da baoltret, a dreuz an amzeriou
A chomo garanet don en ho c'halonou ;
Kenderc'hel a raïo, sonn diwar he sijen,
Da laret d'ê beza 'veltoud gwir Fransijen.

Daoust ma leraez 'oa red demp « trec'hi pe vervel ? »
Vi dê eur gwir reolien, en eur gentel,
Da gerzet gant furnez, 'n eur ober lezennou
Da c'harz na vo biken ken ar seurt brezelloù.

Sevel a ran ma mouez dirakout da laret,
O laket ar Boblou muioc'h de n'em garet
Goude biskoaz hini neuz deut ouzit a benn,
Te dal beza douget gante da virviken !

Ha kement-se me gred, eun deiz a neur gavo,
Rag gwir Republik Franz bepred a lugerno
Dreist an holl broyou all, 'vel 'deuz gret a viskoaz,
Hag en deiz-se, Poalu, te vo kalz brassoc'h c'hoaz !

Da c'hortoz, kenvroiz kanomp a vouez hûel,
A bep seurt meulodi da *Hini* Breiz-Izel !
N'euz gret enor he Vro dispont en pep tachen ;
Gloar hag enor dezan er Bed da virviken !

Ch. ROLLAND.